

Trede Sul ar C'hoariz

“Aotrou, ro din an dour-se, evit ma n'am bo mui seched.”

Breudeur ha C'hoarezed,

A-hed ar skeudenn-mañ gant ar Samaritanez e vez Jezuz o vont bepred etre ar bed naturel hag ar bed dreistnaturel, o lakaat e gendivizerien — ar Samaritanez hag e ziskibien — da dremen eus an naturel d'an dreistnaturel. Met evit sikour e gendivizerien da vont betek gwirvoudoù doueel, Jezuz a anavez ezhommoù hon denelezh. Gouzañv a ra ar sec'hed. Setu lojik an Enkorfadur : evel pep den, en deus Jezuz naon ha sec'hed. Ne dec'h ket diouzh ar pezh a vev an denelezh ; kentoc'h e tegemer anezhañ evit kas an denelezh d'ur gwirvoud all. Ar sec'hed a sant amañ e-kreiz an deiz a ziskouez ivez ar sec'hed a c'houzañvo pa varvo war ar groaz. War ar groaz, e komprenomp aes en deus Jezuz sec'hed en un doare naturel, met ivez en un doare dreistnaturel : Sec'hed en deus eus ar garantez, sec'hed en deus eus Doue, daou sec'hed a vev an holl dud. Ar sec'hed dreistnaturel-se eo a zeuas Jezuz da zegemer hag a ginnig d'e Dad d'ar mare ma tenn e alan diwezhañ.

Ur gwir sec'hed en deus hag e c'houlenn digant ar Samaritanez un evaj. Hag e-keit ma komz ganti e tihun enni ar c'hoant da gaout an dour bev a lakaio he sec'hed da vont da get da viken. Ne gompren ket ar Samaritanez ha goulenn a ra da Jezuz reiñ an dour-se dezhi evit ma ne vo ket ret dezhi dont d'ar puñs morse ken da dennañ dour. Ober a ra c'hoazh war un dachenn naturel. Met dre he c'has betek ar wirionez diwar-benn he buhez ha diskouez dezhi e anavez he buhez, e kuita ar framm naturel evit mont war ar framm dreistnaturel e lec'h ma felle da Jezuz kas anezhi.

Gwelet a reomp ar memes tra en diskibien. Pa'z ejont kuit da brenañ boued ha pa zistroont da gavout Jezuz o komz gant ar Samaritanez, e lavar Jezuz dezho : « Boued am eus da zebriñ ha n'ouzoc'h netra diwar e benn. » Jezuz a gas anezho en tu all d'ar framm naturel evit mont betek ur magadur dreistnaturel hag a zo d'ober bolontez Doue.

Petra a lavar kement-mañ deomp ? Breudeur ha C'hoarezed, kement-mañ a zesk deomp evit mont war-zu ar gwirvoudoù dreistnaturel, Jezuz a enor ar gwirvoudoù naturel da gentañ ha bepred. Gwelout a reomp ar memes tra en Aviel diwar-benn Bara ar Vuhez. A-raok prientiñ e ziskibien da zegemer e gorf e stumm bara, e liesaas Jezuz div wech ar bara hag ar pesked, da ziskouez ez eo EN boued an denelezh.

An Iliz, evit he lod, he deus atav graet evel-se. A-raok komz eus Jezuz ha Doue, e ra an Iliz a-viskoazh war dro poanioù ha glac'har an denelezh : en o magañ hag o skoliatañ. Sant Erwan a zo amañ ur skouer vad, e zi oa atav digor d'ar re baourañ ha d'ar re ezommek. Ne c'hellomp ket mont e darempred gant ar gwirvoudoù dreistnaturel hep tremen da gentañ dre gwirvoudoù naturel. Er spered-se, Breudeur ha C'hoarezed, trugarekaomp an holl gevredigezhioù kristen a ra war-dro holl baourentez hag ezhommoù hor bed ; met ret eo dezho derc'hel soñj ivez eo o fal kas an dud war-zu gwirvoudoù dreistnaturel ha war-zu Doue. A-hend-all ez eus un dra bennak diglok er servij a reont en anv ar feiz kristen.

Ar pazenn zibar a gas ar Samaritanez eus ar bed naturel d'ar bed dreistnaturel eo ar wirionez a c'halv Jezuz da lakaat he buhez : « Kae, galv da gwaz ha distro », emezañ dezhi. Hag he respont e gwirionez n'he deus pried ebet. Jezuz a gas anezhi da vezañ gwir diwar-benn he buhez, met ne varn anezhi biskoazh. Hi eo a zigor he c'halon, a gofes en ur zisplegañ stad he buhez hepken. Barnedigezh ebet, kondaonidigezh ebet gant Jezuz.

Breudeur ha c'hoarezed, se a laka ac'hanomp da soñjal pa sikour Doue ac'hanomp da vezañ gwir diwar-benn un degouezh, diwar-benn un den, diwar-benn un darvoud, diwar-benn hor buhez, e vez bepred ur skoazell d'ar vad. Ha paneve ket gwall brav ar wirionez, ar wirionez a zeu a-berzh Doue ne ra morse droug. Sioulaat a ra, yac'haat a ra, frealziñ a ra, remediñ a ra. N'eo ket ur wirionez hag a ra droug, pe a zistruj. Er vuhez e c'hallit kejañ gant genou bras hag a lavaro deoc'h ar wirionez diwar-benn dram-dra, pe a lavaro deoc'h ho pegement; hag e c'hell bezañ poanius. Ar wirionez a zeu a-berzh Doue n'eo morse evel-se.

Sakramant ar gofesion en deus daou dra pouezus-kenañ: da gentañ, e kas ac'hanomp da lakaat ar gwir war hor buhez, da sellout pizh ouzh hor c'houstiañs, en ur lakaat ac'hanomp dindan sell Doue. An enklask-se dindan sell Doue ne ra poan ebet. Met ma ra poan, eo abalamour n'eo ket graet dindan sell Doue, met dindan ur santad kablusted. Ha da heul, ar gofes eo ar pardon a vez roet deomp hag a laka ac'hanomp da vezañ dieubet da viken. Breudeur ha C'hoarezed, ar gofesion a-raok Pask e-pad amzer ar c'horaiz a zo ur c'hras dispar kinniget deomp.

Ar Samaritanez he doa kofesed he buhez da Jezuz. Hag EN a zegemeras ar pezh he doa lavaret hep barn hag e mod-se a roas tro d'ar Samaritanez da vont war ar bed dreistnaturel. Kompren a rae e oa Doue mammenn pep tra hag e ro dañvez d'he buhez. Gounezet oa bet da zoue. Dont a reas da vezañ diskiblezh da Jezuz, hag evit implijout un droienn eus ar pab Benead XVI, e teuas da vezañ un "diskiblez misioner". Hiziv an deiz, en em c'houlennomp penaos e c'hell ar re badezet, an Iliz hec'h-unan bezañ misioner. Dont a ra ar goulenn-se da vezañ pouezusoc'h-pouezusañ bremañ m'eo deuet ar gristenien hag ar gatoliked da vezañ ur minorelezh. An eskibien, an eskoptioù, ar parrezioù hag ar gristenien a zo o prederiañ war an doare da vezañ ur misioner gwelloc'h er bed a-vremañ. Hiziv, an Aviel a ginnig deomp ur respont: dre an distro ouzh Doue. Ma hon eus bet ur gwir gwiziegezh eus Doue en hor buhez, ma hon eus troet hor buhez war-zu Doue, ma hon eus bevet ar wirionez-se hag a ro ar frankiz, hag a zegas ar peoc'h, neuze, dre natur, e teuomp da vezañ misionerien. N'eo ket hepken dre hon doare da vevañ, met ivez dre ar pezh a lavaromp. En Aviel e teu ar Samaritanez da lavarout d'an dud: « Deuit da welet un den hag en deus kontet din kement am eus graet; daoust hag eñ eo ar Mesiaz? »

Nerzh he youl misioner a zo e donder he c'hemm, en emgav personel ha treuzfurmus-se he deus bevet gant Jezuz. Ma fell deomp bezañ misionerien muioc'h hiziv, krogomp gant ur c'hemm don.

Breudeur ha c'hoarezed, lakaomp pep hini eus hor buhez dindan sell Doue; goulennomp digant an Aotrou ar c'hras, e-pad an oferenn-mañ, da c'hallout talañ ouzh ar wirionez en hor buhez, en hon darempredoù. Ar C'horaiz a zo un amzer disheñvel evit sevel hon daoulagad hag hor c'halon war-zu ar gwirvoudoù an neñv, war-zu ar vuhez dreistnaturel e lec'h ez omp galvet; ha dalc'homp en hor pedennou an holl c'hatekumened hag a zo en em aozañ d'ar vadiziant, ha dreist-holl d'ar re a zo en hor parrez. Amen!

+

3^{ème} Dimanche de Carême

« Seigneur, donne-moi de cette eau, que je n'aie plus soif. »

Frères et Sœurs,

Sans cesse au cours de cette scène avec la Samaritaine, Jésus oscille entre le plan naturel et le plan surnaturel, conduisant ses interlocuteurs, la Samaritaine, ses disciples, à passer du plan naturel au plan surnaturel. Mais pour faire accéder ses interlocuteurs aux réalités divines, Jésus s'identifie Lui-même aux besoins de notre humanité. Il endure la soif. C'est ici la logique de l'Incarnation : comme tout être humain, il a faim et il a soif. Il n'échappe pas à ce que vivent les hommes, bien plus Il l'assume mais pour pouvoir faire accéder l'humanité à une autre réalité. La soif qu'Il éprouve ici en plein milieu de la journée renvoie également à la soif qu'Il endurera en train de mourir sur la croix. Sur la croix nous comprenons aisément que Jésus a soif de manière naturelle, mais aussi de manière surnaturelle : Il a soif d'amour, Il a soif de Dieu, deux soifs que portent les hommes. C'est cette soif surnaturelle que Jésus est venu assumer et qu'Il offre à son Père au moment où Il va remettre son dernier souffle.

Assumant la soif naturelle, Il demande à la Samaritaine de lui donner à boire. Et alors qu'Il entre en dialogue avec elle, Il creuse en elle le désir d'accéder à l'eau vive, qui éteindra à jamais sa soif. La Samaritaine ne comprend pas et elle répond à Jésus de lui donner de cette eau pour qu'elle n'ait plus à venir au puits puiser. Elle se situe encore sur un plan naturel. Mais en la conduisant à faire la vérité sur sa vie et en lui montrant qu'Il connaît sa vie, elle quitte le plan naturel pour accéder au plan surnaturel auquel Jésus voulait la conduire.

Nous constatons la même conversion chez les disciples. Alors qu'ils sont partis acheter à manger et qu'à leur retour ils trouvent Jésus en train de discuter avec la Samaritaine, Jésus leur répond : « Pour moi, j'ai de quoi manger : c'est une nourriture que vous ne connaissez pas. » Jésus les amène à dépasser le plan naturel pour accéder à une nourriture surnaturelle qui consiste à faire la volonté de Dieu.

Qu'est-ce que cela nous dit ? Frères et Sœurs, cela nous apprend que pour nous faire accéder aux réalités surnaturelles, Jésus honore d'abord et toujours les réalités naturelles. Nous voyons la même chose dans l'Évangile au sujet du Pain de vie. Avant de préparer ses disciples à recevoir son Corps sous la forme du pain, Jésus a par deux fois multiplié les pains et les poissons, montrant qu'Il est la nourriture de l'homme.

L'Église pour sa part a toujours agi de la sorte. Avant de parler de Jésus et de Dieu, l'Église s'est toujours préoccupé des souffrances et des misères des hommes : en les soignant, en les nourrissant, en les instruisant. Saint Yves est ici un bon exemple, lui dont la table était toujours ouverte aux plus pauvres et aux plus nécessiteux. On ne peut pas accéder aux réalités surnaturelles sans passer d'abord et sans assumer les réalités naturelles. Dans cette logique Frères et Sœurs, rendons grâce pour toutes les associations caritatives chrétiennes qui prennent soin de toutes les pauvretés et les nécessités de notre monde ; mais que ces associations n'oublient pas non plus que leur but est de conduire les gens aux réalités surnaturelles et à Dieu. Sinon il y a quelque chose d'incomplet dans le service qu'elles rendent au nom de la foi chrétienne.

L'étape décisive qui fait passer la Samaritaine du plan naturel au plan surnaturel est la vérité que Jésus l'appelle à faire sur sa vie : « Va, appelle ton mari et reviens. » lui dit-Il. Et elle de répondre en vérité qu'elle n'a pas de mari. Jésus l'a conduite à faire la vérité sur sa vie, mais vous remarquerez qu'à

aucun moment Jésus ne la juge. C'est elle qui ouvre son cœur, qui se confesse en disant très simplement l'état de sa vie. Pas de jugement, pas de condamnation chez Jésus.

Frères et sœurs, cela nous amène à prendre en compte le fait que lorsque Dieu nous aide à faire la vérité sur une situation, sur une personne, sur un évènement, sur notre vie, cela contribue toujours au bien. Même si la vérité n'est pas belle ou folichonne comme on dit en français, la vérité qui vient de Dieu ne fait jamais de mal. Elle apaise, elle guérit, elle console, elle soigne. Ce n'est pas une vérité qui fait du mal, qui blesse et qui détruit. Vous pouvez croiser dans la vie des gens francs qui vont vous dire la vérité sur telle ou telle chose ou qui vont vous dire leur vérité ; et vous pourrez constater combien parfois cette vérité fait mal et abîme. La vérité qui vient de Dieu n'est jamais de cet ordre.

Le sacrement de la confession a cet avantage qu'il présente deux temps profondément importants : tout d'abord il amène à faire la vérité sur sa vie, à examiner sa conscience comme on dit, en se mettant sous le regard de Dieu. Cet examen sous le regard de Dieu ne fait jamais mal. Ou alors c'est qu'il n'est pas fait sous le regard de Dieu, mais sous l'influence de la culpabilité. Et le deuxième temps de la confession est le pardon qui nous est donné et qui nous libère définitivement. Frères et Sœurs, ne passez pas à côté de la confession avant Pâques en ce temps de carême ! C'est une grâce qui nous est offerte.

Le fait d'avoir confessé sa vie à Jésus qui a accueilli ce qu'elle a dit sans la juger, fait accéder la Samaritaine au plan surnaturel. Elle comprend que Dieu est la source de tout et qu'Il donne consistance à sa vie. Elle est convertie. Elle devient disciple de Jésus, et pour reprendre une expression du pape Benoît XVI, elle devient « disciple missionnaire ». On s'interroge beaucoup aujourd'hui sur notre qualité de missionnaire pour les baptisés, pour l'Église elle-même. Cette question devient plus importante à l'heure où les chrétiens et les catholiques sont devenus minoritaires. Les évêques, les diocèses, les paroisses, les chrétiens réfléchissent à la manière d'être davantage missionnaires dans le monde d'aujourd'hui. Aujourd'hui l'Évangile nous apporte une réponse : en nous convertissant. Si nous avons fait une réelle expérience de Dieu dans notre vie, si nous avons tourné notre vie vers Dieu, si nous avons fait l'expérience de cette vérité qui libère, guérit et apaise, alors de manière tout à fait naturelle, sans nous forcer, nous devenons missionnaires. Pas seulement par notre manière de vivre, mais aussi par ce que nous dirons. Dans l'Évangile, la Samaritaine devient une servante de la rencontre avec Jésus. Elle dit à ses connaissances : « Venez voir un homme qui m'a dit tout ce que j'ai fait. Ne serait-il pas le Christ ? »

La force de son zèle missionnaire réside dans la profondeur de sa conversion, dans cette rencontre personnelle et transformante qu'elle a vécue avec Jésus. Si nous voulons être davantage missionnaires aujourd'hui, commençons d'abord par nous convertir en profondeur.

Frères et sœurs, mettons chacune de nos vies sous le regard de Dieu ; demandons la grâce au Seigneur au cours de cette messe de pouvoir faire la vérité sur notre vie, sur nous-mêmes, sur nos relations. Profitons du carême pour lever nos regards et nos cœurs vers les réalités célestes, vers la vie sur naturelle à laquelle nous sommes appelés ; et portons dans notre prière tous les catéchumènes qui se préparent au baptême et plus particulièrement ceux de notre paroisse qui vont vivre ce dimanche leur premier scrutin. Amen !